

Ter Ganaouenn Vrezounek



1. - Evel " Ninon "
2. - Zon ar Butun
3. - An Hini Goz



Evel « Ninon »

DISKAN :

Tampiviti, tampiviti,
Tampiviti, tampivita.

1

Eur plac'hig yaouank eus ma bro
tampiviti, tampiviti,
Eur plac'hig yaouank eus ma bro
He deus bet troc'het he bleo.

2

Kredi 'ra d'ei eo plac'h ruzet
tampiviti, tampiviti,
Kredi 'ra d'ei eo plac'h ruzet,
Ken sot n'am oa kammed gwelet.

3

Rak evit bean deus ar c'hiz,
tampiviti, tampiviti,
Rak evit bean deus ar c'hiz
Ec'h afe memes 'n he c'hiviz.

4

Ne vanke d'ezi netra ken
tampiviti, tampiviti,
Ne vanke d'ezi netra ken,
Talonou uhel, lèrou gwenn.

5

C'h a da gaout ar perrukener,
tampiviti, tampiviti,
C'h a da gaout ar perrukener
Hag e lavar : « Troc'het 'nè berr... »

6

« Troc'het 'nè d'in-me 'vel « Ninon »
tampiviti, tampiviti,
« Troc'het 'nè d'in-me 'vel « Ninon »
Vit bean 'velti war an tòn ».

7

Ha troc'het he bleo d'ar gêzez,
tampiviti, tampiviti,
Ha troc'het he bleo d'ar gêzez,
Ma fount breman, ya, gant ar vez !

8

He fenn 'zo 'vel eur penn marmouz,
tampiviti, tampiviti,
He fenn 'zo 'vel eur penn marmouz,
He goug a zo hir hir ha rouz.

9

Merc'hed yaouank, me ho pedo,
tampiviti, tampiviti,
Merc'hed yaouank, me ho pedo,
Na droc'het kammed ho pleo.

10

Rak ar bôtred, sur a facho,
tampiviti, tampiviti,
Rak ar bôtred, sur a facho,
Ha diouzoc'h int a bellao.

Son ar Butun

1

Chilaouet, tud vat, me ho ped,
Eur zôn vihan neve savet
War ar butun,
War eul louzaouenn ken prizet
A lak ken sart ar Vretoned
Epad ar zun.

2

Ar butun poultr 'zo eun drat vat
'Vit ar boan-bénn, an daoulagad,
'Vit ar sifern ;
Netra na argas eveltan
Ar boan-spered, ya, pa lâran,
Hag an anken.

3

Kato da Soaz a lavare :
« Ro eur brizenn d'in-me ive,
Unan vihan,
Rak pa ve stouvet kaer ma fenn,
E ven eur plac'h ken digompren,
Ken diskiant ! »

4

Adalek trizek vlâ, Yann-grenn
Pac'h a d'ar foar, a ve laouen,
Rak evelse
Pell diouz e vamm ha diouz e dad
E c'hall dibreder butunat
Epad an de.

5

Ma zad-koz war e vank-tosel,
Kreiz ar goanv, pa yud an avel
Er siminal,
E gorn gantan en e c'henou
D'e vab-bihan 'lâr marvailhou
Evel gwechall.

6


Tonton jakek, bep beure mat,
Pac'h a d'ar park da labourat,
A ve gwelet
O furchal en e jiletenn
Hag o tennan eur gorreenn
Chik mat meurbet.

7

Tonton Pibi, pac'h a e ker,
'Ve drant evel an alc'houeder
Ha skanv e droad,
Rak e kêr, str mat, e kavo
Eun tamm chik, tensor ar geno :
Dek kwennegad !

8

Kaer 'nevo Kaillo c'houiïstellat,
Hag ober d'ar butun kerât,
Engal a zo,
E vutuno ar Vretoned
Ha ze hep bean re nec'he
Ya, dampred vo l



An Hini Goz

DISKAN :

An hini goz eo va dous,
An hini goz eo, sur !

1

An hini goz he deus arc'hant,
An hini yaouank a zo koant.

2

An hini goz he deus bleo gwenn,
An hini yaouank bleo melen.

3

An hini goz ebars an ti,
Ne jom ket da feneanti.

4

An hini goz da labourat,
A rafe mez d'eun ozac'h mat.

5

An hini goz er pardonioù,
Ne jom ket da glask bannac'hou.

6

An hini goz a zo gwisket,
Evel ar gwir Vretonezed.

7

An hini yaouank dre ma 'z a,
Ne ra 'met c'hoarzin ha kana.

8

An hini yaouank war he fenn,
Ne oar ket kas ar pod soubenn.

9

An hini yaouank er foarioù,
A jom da lipat likurioù.

10

An hini goz 'zo bretonnez,
An hini yaouank 'zo gallez.

Kempennet gant P. Tr.